

Milin Gabriel (Kastell-Paol 1822 – Enez Vaz 1895)

Ɔeuvres posthumes, bet embannet e 1901.
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Enez Vaz

Pevar-ugent vloaz a zo

Taolenn

Iliz koz Sant Paol Aurelian

Buhez merhed Enez-Vaz

Buhez ar martolod

Ar barr-amzer

Eur beleg koz

Pa oan paotr bihan

Iliz koz Sant Paol Aurelian

Kosa iliz 'zo tro-war-dro
A zo, Eneziz, en ho pro ;
Iliz savet he mogerious
Gand sant Paol ha gand ho tadou.

Trizeg-kant vloaz 'zo abaoe
M'eo bet konsakret da Zoue,
Ha kant vloaz tost n'he-deus ken toenn,
Nemed an neñv a-zious he fenn.

E-leh hoh iliz Paol genta,
Peder moger a zo brema',
Peder moger, en-dro dezo,
Eur bern trêz gwenn heb netra beo.

Heb iliavenn na tamm glazder,
Nemed mein noaz gand gwall amzer,
Nemed ar mor a doull en-dro
Da zond dioh an daou du warno.

Mor kounnaret, te a redje
Diouz Iliz sant Paol, ma vevje,
Evel gwechall 'reas dit tehed
Diouz ti he c'hoar, ganez nehet.

Maro sant Paol, hag e iliz
Ar genta digoret d'ar feiz
'Zo, eme 'n dud, ouz he gweled,
Eun druez e ve dilezet.

Dilezet ! ne deo ket biskoaz ;
Gouzoud a reer en Enez-Vaz
Ez eo bet enni ar re goz
O teski mond d'ar Baradoz.

Tud Enez-Vaz 'vel o zadou
'Ya kaloneg, war o roudou.
Goude ouspenn trizeg-kant vloaz
Da zaoulina ouz treid ar Groaz.

Tud Enez-Vaz ne rafent ket,
Hag i paour, 'vid madou ar bed,
Mogerious noaz o iliz Paol
'Zo karet meurbed ganto oll !

O iliz Paol 'zegas dezo
Soñj euz o zud 'zo bet eno.
Beo, o houzañv kalz a enkreuz,
Maro gand feiz, gand karantez.

Feiz, karantez 'han er havell
Da vond d'an neñv 'zo diouaskell,
Er bed, diou flah a harp an den

War hent a boan hag an anken.

Dre an hent-se o-deus kerzet
O zadou koz 'zo er vered,
Dindan an trêz o relegou
Er baradoz o eneou.

Bugal sent, hag en o bro,
Tud Enez Vaz bremañ d'o zro,
Martoloded ha merhed keiz
Ne zilezont iliz o feiz.

Sul ha pemdez, den dre eno
Nag er ganol ne dremeno
Heb dizolei ha stoui e benn
En eur lavared eur bedenn.

Ne deus¹ eur hristen en Enez
Ne garfe gweled a-nevez
Iliz sant Paol o lugerni,
Beziou e dud en-dro dezi.

Iliz sant Paol 'zo en Enez
Evel arh Noe war ar menez ;
Anezi 'teu d'ar gristenien
Nerz ha fiziañs war-lerh anken.

Iliz sant Paol, pell amzer 'zo,
'Vije savet gand tud ar vro.
Kaset diouti ar mor a-bell
Ha gwentet an trêz en avel.

Ma vije galloud o divreh
Evid tizoud, dougen daou veh,
Ma vije o halon nerzuz
Evid ma'z eo karantezuz.

Allaz ! Doue a ro d'an den
E labour, e boan, e anken
Evid e vad war ar bed-ma' ;
Doue a ra ar pezh 'zo ar gwella.

Doue ne stok ket ouz ar garreg
Lestr ar martolod kaloneg,
En-deus feiz kreñv e vamm, e dad,
A gar e zivreh labourad.

Doue ho kar-c'hwi, merhed keiz ;
E-leh madou da goll ho feiz
E ro deoh kalz a yehed
Ha nerz da hounid ho poued !

¹ Ne deus : leoneg : n'ez eus.

Buhez merhed Enez-Vaz

En Enez-Vaz ne vager ket
Merhed da chom war an oaled ;
Kaled- meurbed eo o buhez,
Doue, outo bezit truez.

Koz ha yaouank, a-vihanig
Pe i 'zo paour pe binvidig,
Ouz o foan ez int digernez
Mar dint bet ganet en Enez.

Pa vez yen da skorna ar bed,
Pa varv ar gwad er gwazied,
Oh pep toenn pa vez hinkiniou,
E-kichenn an tan pa vez riou.

Neuze d'an aod a-raog an deiz
Ez a d'ar red ar merhed keiz
Da lammed o skrija er mor
War-lerh eur bod bezin Arvor.

Aluzenn Doue d'ar re 'zo paour,
Pinvidigez ar re 'labour,
Ar bezin eo red da veva
Arhant ha keuneud da domma.

Siwaz ! ganto ne vez lezet
O bezin heb beza laeret,
Bezin hag a dle al lezenn
Da dud ar vro, tamm d'an estren.

Da wragez martoloded keiz,
A varvfe kant gwech noz ha deiz
Evid savetei ar re all ;
D'ar re a ra vad e vez greet fall.

Ar merhed e-kreiz ar mêziou
Deut glao, kazarh, n'o-deus ket riou,
A nerz o horv o labourad,
Da hounid boued dezo, d'o ziad.

Hada, c'hwennad, medi a reont,
Medet o ed e simiadont
War o hein a-zammou pounner
Evid hen dorna en o hêr.

Ganto o eost pa vez dornet,
'Vez krazet, gwentet, dastumet,
El leh ma kaver dilastez
Kement 'zo red, en tiegez.

Ma labouront heb damant
En aod, er mêziou, difazi,
En o ziez, ken nebeud all

Ne gavfet netra da damall.

Heb aon e heller lavared
E labouront koulz ha gwazed,
E talhont o ziegeziou
Reizet koulz ha tiez ar hêriou.

Outo evel oh peb unan
Evelato e stag ar boan,
Rag bez' ez int kig ha krohenn
Ha ganet gand mammou kristen.

Boazet da gas pep loustoni
Euz o douar hag euz o zi,
Euz ar mêziou deut skuiz d'ar gêr,
Ne chomont ket vak na dibreder.

Koulz kreh ha traoñ, e-bazr, en dro,
Pep tra 'zo digaiillar ganto,
Gwalhet, paret, pep tra kempenn,
Hag en o hreiz o ene gwenn.

Ma n'int evel merhed a zo
Ken drouglivet ha lêz-goro,
Warno ema liou ar yhed,
Liou al labour a hounid boued.

Eul liou, hennez hag a zo kaer,
Kroget enno dioh an amzer,
Liou ne vir ket ouz o hrohenn
Da veza flamm, i, rue o fenn ;

Plahed yaouank da gaoud kened
Ken o-deus mez, dimezelled,
Gwragez, merhed, da gaoud kalon
'Zo koulz ha kalon peb itron.

Da gared mad o friejou,
Da zevel o bugaligou,
Da zegas war o fenn bemdez
Bennoz Doue, bennoz ar Werhez.

Da gaoud yhed, da veva koz,
Da vond rag-eeun d'ar Baradoz
En eur zilezel ar bed-ma' ;
Al labour vad a diz uhella.

Dezo n'eo ket nebeud a dra
Gouzoud gounid o zamm bara.
Hen debri c'hwek p'eo gounezet,
Mervel evel m'o-deus bevet.

Kredi a reont ez eo Doue leal,
Ne varn heñvel ar mad, ar fall,
Ha ne damall ket gwragez

N'int ket eun devez didalvez.

Da verhed ebed² tro-war-dro
N'eus labour ken diêz e neb bro,
Ne ve outo evid herzel
Gwraze eur vro all heb mervel.

Kerkoulz eun ti evel er-meaz³
Skwer pep merhed⁴ eo merhed Baz
A gar o zud 'leiz o ene,
A dreh o foan da vond d'an neñv⁵.

A gar o zud, a ro dezo
Nerz o divreh d'o derhel beo,
Nerz o halon, ha ma vez red
Ar gwad a zo en o gwazied.

Merhed int, mammou ar re-ze,
Karantezuz hag a feiz kreñv⁶ !
Kas war ar mor 'reont o faotred
Da houzoud hag uhel e' ar stered,

Ha don ha ledan eo ar mor,
Pa vezont pell diouz an Arvor.
Ha da lavared en distro
Petra a dalv merhed o bro.

A zesk dezo 'ranker kredi,
Douja, kared, kared meuli
Doue a gas lestr ar martolod,
Ha pa gar hen distro d'an aod.

Heb feiz d'harpa o harantez
Heb fiziañs e Doue, er Werhez,
Penaos e hellef merhed keiz
Herzel ouz poan ha neh noz-deiz !

Rag merhed Baz n'o-deus ket o far
Da gaoud er bed poan ha glahar.
Poan o veva, gwalh o halon,
Neh gand o zud war eur mor don.

Goude o labour poaniusa
'Teuont d'ar gêr da ziskuiza,
Ez eont d'o gwele da gousked
O soñjal en o zud karet.

Mamm, en he mab, en he bugel,
Gwreg en he fried a zo pell
En eul lestrig war mor braz
Ha nemed dorn Doue ouz e gas.

² verhed ebed : verh ebed (e-bed = er bed)..

³ er-meaz : leoneg, evid ar rim ; er-mêz.

⁴ pep merhed : pep merh.

⁵ neñv : distaget "ne".

⁶ kreñv : distaget "kre".

Neuze prijou ha mammou
A zao d'an neñv o halonou ;
A bed Jezuz, Mari, Anna,
Da zerhel o zud er bed-ma' .

Da rei dezo nerz ha yehed
Da vired na vezo beuzet
Tud kaloneg a rank beva
Pell diouz ar re 'garont muia.

Da zegas o listri en-dro
Gand avel vad war-zu o bro,
Evid ma hellint c'hoaz heb aon
O briata war o halon.

E-pad an noz, a-greiz kousked,
War-lerh o zud 'nij o spered
Hag o gwelont, a gav dezo,
En em gavet er gêr, er vro.

A-wechou all, o ! kalonad !
'Welont o fried pe o zad
Torret e lestr, - war eur plankenn.
Merhed, eun huñvre eo hepken.

Gand an deiz e teu a-nevez
Al labour, ar boan, an enkreuz.
Ne viront oh kalon a gar
Da nijal war-lerh he glahar !

Rag merhed Baz a oar ervad
Mar o-deus poan, ebat o stad
E-skoaz stad o martoloded
War eur mor don e weled.

Hag a zao evel meneziou,
Da strinka a-lamm e darziou
War eul lestrig a zo e-barz
O harantez e tredemarz.

Dindan o zreid i o-deus douar
Da harpa warnañ o glahar ;
Ar martolod n'en-deus hepken
Nemed *o loh* eun tamm plankenn.

Siwaz ! mar deufe da doulla
'Z afe gand ar mor da ruilla,
E gorv da veza dispennet
Hag e eskern paour bruzunet.

D'ar martolod koz, yaouank-flamm,
Bet maget war barlenn eur vamm.
Skrijuz 'mervel hep kenavo
D'e dad, d'e vamm, d'e dud, d'e vro.

Ya, merhed Baz a oar ervad
Mar o-deus poan, ebat o stad
E-skoaz stad tud a rank mervel,
Heb den ebed 'med Doue a wel.

Den nemed Doue hag e êlez,
Santez Anna hag ar Werhez
O tond d'o zebelia en-dro,
Pe da zavetei anezo.

Eüruz eo ar vartoloded
'Zo merhed 'vito daoulinet,
Rag pedenn vamm, pried pe c'hoar,
Dibaot a zo kouezet d'an douar.

Heb degas war ar penn karet
Grasou mad da veza salvet,
Heb degas euz goueled ar mor
Tud, listri hag all d'an arvor⁷.

Pedit eta, merhed, bemdez,
Santez Anna hag ar Werhez,
Ha dre ho pedenn selaouet,
Ne vezoh ket intañvezed.

Ne chomo ho pugaligou
Hep tad da gaoud naon, da gaoud riou,
Heb mamm na den war an douar
Mar marvit gand doan ha glahar.

Ho pedenn galoneg santel
D'ho tud keiz a zo eur vantell
A daol diwarno e peb leh
Gwall avel, gwall vor ha gwall veh.

Ezomm o-deus ezu ho pedenn,
Rag ker kaled o flanedenn
N'hellont atao ouz poan herzel.
Pedit : pedi a zesk mervel.

⁷ arvor : ribl ar mor.

Buhez ar martolod

Ar martolod yaouankig-flamm
Euz a zivreh tener e vamm
'Ya da zigeri e ero
War ar mor beteg ar maro.

E galonig paour o ranna
Hag e zaoulagad o ouela,
E lavar kenavo d'e dad,
D'e vamm, d'e hoar ha d'e vro vad.

Allaz ! ne oar ar paour-keaz⁸ !
Hag o gweled a raio c'hoaz ;
Ar mor a zo don ha ledan,
Eñ hag e lestr a zo bihan.

Bihan eo ha braz e galon
Rag outañ e ziou vrehig sonn
A zo o houlenn labourad
Da rei diskuiz d'e vamm, d'e dad.

Evito, kaloneg, nerzuz
Ouz e boan ne vo damantuz,
Enno e soñjo deiz ha noz
War e lestr 'zo ouz e hortoz.

C'hweza kreñv a ra an avel,
Al lestr a lamm, digor e ouel ;
Pellaad a ra diouz an aod
Gand ar bugelig martolod.

Etre Enez-Vaz ha Rosko
Ar paotrig kêz a zell en-dro,
A wel e dad, e vamm, e hoar,
Kenavezo dezo 'lavar.

Mamm, tad ha c'hoar, kenavezo !
Me 'vezo braz pa deuin en-dro ;
Kenavezo, tud Enez-Vaz !
Ha te, bro ger, a welan c'hoaz.

Kenavezo, mignoned,
Me ne din ken ganeoh d'ar red
D'an aod diarhen gand va bagig.
Martolod on, n'on ken paotrig.

Iliz sant Paol, santez Anna,
Kenavo dond da bardonia.
Pa zistroin euz va beaj kenta !
Ne ouzon peleh 'z an brema'.

Hag ar paotr dizolo e benn

⁸ keaz : leoneg, evid ar rim : kêz.

A hirvoud neuze eur bedenn
En e galonig o frailla,
Dre e zaelou o tifronka.

Santez Anna ha c’hwi : Gwerhez,
Gand mousig Baz bezit truez !
Va mamm baour a zo pell diouzin.
Evel diou vamm, c’hwi a garin.

C’hwi a garin, c’hwi a bedin
Evel er gêr noz ha mintin,
Rag va mamm he-deus lavaret
Ho pedi ho-tiou, ho kared.

C’hwi, emezi, evel Jezuz
‘Zo oh an oll trugarezuz ;
Ha diou vamm ar vartoloded
Ne fell ket deoh e vent kollet.

C’hwi ‘zo bremañ va diou vamm-me.
Me a zo martolod ive’.
Martolod Mari hag Anna.
Chomit tost din, tost d’am harpa.

Al lestr brmañ gand herr a red
Evel eun alar hed-ha-hed ;
E gein a faout ar penngennou⁹,
A ya a-lamm dreist o hernou.

Dre ma pella ar paour keaz¹⁰
Ne zistro ken diouz Enez-Vaz
E zaoulagad a glask atao,
Gwella ‘hellont, gweled e vro.

Gweled c’hoaz a ra Enez-Vaz,
Moged a-zioh ti e vamm geaz¹¹,
Uhelloh, koabr ruz a-renkadou
Ha penn an tourtan en neñvou.

Bremañ ne wel e rez ar mor
Nemed a-bell skeud an Arvor,
Hag Enez-Vaz hag an neñvou
O vond teuzet, unan o-daou.

Etrezo c’hoaz eur rizenn wenn,
‘Ve lavaret eur gurunenn
A-zioh iliz sant Paol en trêz.
Sell, sell outi, va faotrig kêz !

Ahano az-po, mar kerez,
Ar pezh a zo red dit bemdez :

⁹ ar penngennou : notenn e galleg : Le jeune matelot se rappelle qu’il a labouré la terre : *an ervennou* se comprendrait mieux ; on veut sans doute rappeler les sillons que l’on coupe quand on laboure en travers, et que l’on compare aux lames qui courent parallèlement ; *ar penngennou* désigne les planches de terre labourées, séparées entre elles par une dérayure ou petit fossé nécessaire à l’écoulement des eaux.

¹⁰ kêz

¹¹ geaz : gêz.

Nerz ouz ar mor, ouz an avel,
Feiz, karantez wir da vervel.

A-raog ma'z a 'n heol da guzed
E pign er wern vraz da weled,
Eh azez war an delez-kroaz,
'Sell war-zu Baz eur wech all c'hoaz.

Allaz ! bremañ ne wel netra
Nemed e lestr o roudenna.
Ar mor 'zo sioul e gondoniou¹²
Nemed al loar gaer en neñvou.

En-dro dezi, kelh arhantet,
Ar stered lemm, 'vel trêz hadet,
A-dost, a-bell, traou kaer dispar,
Hag eñ o vond gand e hlahaer.

Evel ar mor, braz e anken :
E galon dilavar a-grenn,
E kev drezi, sioul ha dudiuz,
Komzou kaer war doniou kaouvuz¹³.

Ne day euz e ene biken
An noz kenta-ze a dremen
Pell diouz ar re 'gar e galon.
Bugel martolod ar mor don.

Labour, enkreiz, skuizder ha poan
En-deus er bed-mañ peb unan ;
Oh heul ar mous, martolod keaz
Ar poaniou 'zo brasoh c'hoaz.

Setu bremañ ar paotr bihan
War eun hent 'zo dous ha ledan.
Hent 'zo dindan ha war horre
Skrivet lugernuz ano Doue.

Skrivet eo war gern an tarziou
Evel war gern ar menezioù,
Skrivet flamm er pevar avel
Eo¹⁴ Doue peb leh a wel.

Feiz eur martolod 'zo kristen
Ar hreñva fard a vo biken
Oh eor e lestr 'zo taol-distaol,
Anez e tredemarz¹⁵ da goll.

Da gaoud didorr, nerz ouz e boan,
Ne jom gand ar mousig bihan
Nemed e feiz hag ano Doue,
Ha karantez leiz e ene.

¹² gondoniou : gwagennoù braz-spontuz.

¹³ kaouvuz : kañvuz.

¹⁴ Eo ; Ema Doue e peb leh a wel.

¹⁵ tredemarz : dañjer.

Feiz da bedi santez Anna.
Mari, e steredenn gaerra,
A hoarz outañ euz an neñv flamm,
Mari, Anna, 'zo e ziou vamm.

Martoloded, moused vihan,
Dalhit d'ho feiz gwitibunan,
Da feiz ho pro, feiz ho tadou,
Feiz a zo dreist an oll vadou.

Pa zao an deiz, bugelig Baz
A zell a-zehou hag a-gleiz c'hoaz
Da glask gweled, gweled e vro.
An neñv, ar mor, 'wel tro-war-dro.

An neñv, ha pell goueliou listri,
An heol outo o lugerni,
Ar mor a loh e kreiz e veol
Evel droug ennañ e hrozmol.

Bugelig Baz ouz gleved,
O weled e liou drouglivet
A gren en e oll izili
Kren, paourig, hep paouez pedi !

Oed ha labour heb ehana,
Ha Mari ha santez Anna
A vo bepred en da gichenn
O rei dit nerz da veza den.

Den a-leiz, martolod dispar,
Braz, kaloneg da zond d'ar gêr.
Enor da vro ha joa da vamm,
Enor ha joa da beb unan.

Ar vouez 'glev atao en e greiz
A gresk e nerz, a gresk e feiz,
A lavar dezañ : « Lez da gas !
Doue 'zo ganez eo ar mestr braz. »

Bremañ, mor don, 'hellez diroll,
Strinka tarziou beteg an heol,
Heja da voue en neñv uhel
Ha klask tump a lestr ar bugel.

Gouzoud a rez piou 'hourhemenn,
Piou 'lavar dit chom hep tremen ;
Eur hrouanenn 'peus degaset
D'an aod euz ar penn all d'ar bed.

Gouzoud a rez, mor diboellet
Kaer az-pezo, ne lonki ket
Lestr na bagig eur mous bihan
A zo gantañ Doue a-unan.

‘Eneb ar mor hag an avel
An trede deiz, lestr ar bugel
A gerze skañv hag uhel e benn
D’ar vro ma oa e hourhemenn.

Bet eno, ahano ez eas
Ha tro ar bed aliez a reas,
Heb na viras outañ avel,
Kerreg, na mor en e ziboell.

Tremen a ra miziou, bloaveziou,
Euz a vous Baz ne deu kelou.
Hag en Enez ‘ma e glahar
An oll gerent : tad, mamm ha c’hoar.

Seiz vloaz tost a zo tremenet,
An oll a lavar eo beuziet.
An oll ‘zo e kañv, en anken ;
Ar paotr ‘zo yah ha bremañ den.

Seiz vloaz tremenet ne oa pell.
Ar vamm a welas he bugel
Dre eun huñvre e-pad an noz ;
Ar vamm bremañ ‘zo o hortoz.

Beo eo he mab, ne lavar ger
Nemed kredi e teuy d’ar gêr,
Rag evitañ noz ha mintin
He-deus pedet war he daoulin.

‘Vitañ eo bet o pardona
E ti Mari, santez Anna,
E Rumengoll, war he zreid noaz,
Hag e Penn-Baz kant gwech er bloaz.

Pedenn ar vamm war benn ar mab
A zegas bennoz Doue, e dad,
A gas en e raog ar Werhez
D’hen distrei d’ar gêr, heb enkreuz.

Ema o tond, tostaad a ra,
Beg eur wern vraz o tispaka
A weler du-hont en avel,
Dreist ar Penn-wenn¹⁶ a-bell, a-bell.

¹⁶ Penn-wenn : notenn e galleg : nom breton d’un rocher en mer.

Ar barr-amzer

Dreist ar Penn-wenn hag uhelloh,
E-kreiz an oabl a-bez o loh,
Penn eur valkenn spontuz du-pod
War gein ar gwalarn 'deu d'an aod.

Ar barr-amzer 'zo o wiri
A laka skrij en izili,
En daoulagad eur mor daelou
Hag anken don er halonou.

Pedit, priedou ha mammou,
Pedit stard, pedit an Aotrou,
Ar Werhez ha santez Anna,
Evid ho tud, pedit brema' !

Ha c'hwi ive a bed pell zo
Evid ho mab o tond en-dro,
Mamm gêz, pedit, braz eo e veh,
N'ema ket c'hoaz 'tre ho tivreh.

Beteg hirio en-deus harpet
Oh peb amzer ha paon-galed,
Hirio avad dirag ar gear¹⁷
Ma vez beuzet, pebez glahar !

Ar valkenn zu a zo savet,
Ganti ez eo goloet ar bed,
E-kreiz an deiz eo deut an noz,
Luhed a strink, kurun a groz.

An dregern 'zo dre an neñvou
A zegas soñj euz an Aotrou.
An talmou 'stok hag en em gann
Ar hoabr a fraill, 'n douar a lamm.

Ar mor tro-war-dro d'an aojou
A goeñv, a verv glaz-wenn e liou,
A darz, a strink e eonenn
Dreist ar herreg war an tevenn.

Ar hoummou 'bleg o zorgennou
A ya d'ar goueled a-vernoui,
A zao gand nerz rehier pounner
O zaol ouz an aod a-benn-herr.

Trouz ar hroa braz¹⁸ a vez klevet,
Stoket-distoket er goueled,,
E ve lavaret hirvouduz
O tond a-greiz ar hondoniou¹⁹.

¹⁷ ar gear : leoneg : ar gêr

¹⁸ ar hroa braz : notenn gand an oberour : Ar hroa braz désigne la grande grève couverte de rochers éboulés de la côte nord, près du phare.

¹⁹ ar hondoniou : **notenn gand an oberour** : pour *ar hoummou don* ; voir plus haut.

Tornaojou uhel o tiskolpa,
Kerreg a-bez o vruzuna,
Ne weler ha ne glever ken ;
Oh petra eh harzo an den ?

Spontuz an trouz hag ar savar
'Zo war ar mor, war an douar ;
E peb leh 'z eus klemm hag hirvoud
Hag ar gwalarn dreisto a voud.

Gand an amzer zo dirollet,
Gand ar mor a zo diboellet,
Ped den, ped lestr a yel da goll ?
Kleved a rit tennou kanol ?

Eul lestr teir-gwern 'zo o hervel,
Iuz an amzer ne hell herzel ;
Ouz ar herreg, ma vez stoket
'Ve beuzet e vartoloded.

Martoloded Baz, kaloneg,
Her gwel o tond, ha dre 'r herreg,
'Eneb an avel hag ar mor,
'Ya da ober tro an Arvor.

Avel, kerreg, mor o tarza
N'o lakeont morse da giza,
Pa welont listri o terri
Ha breudeur o vond da veuzi.

Ya, breudeur int ha kristenien,
Ha pa vent Saozon zo-mui-ken,
Da vartoloded a varvfe oll
Kent na dafe eun den da goll.

En o hreiz kalonou kristen,
Diskouez a reont (pe ne rafent ken ?)
Petra 'dalv dezo eun ene
'Zo bet prenet gand gwad eun Doue.

Tud ar re-ze, ne zellont ket
'Vid ober vad oh poan ebed,
'Vid ober vad, rei o buhez ;
Ha c'hoaz, ma ve outo truez !

Eur gwenneig o-devezo,
Bennoz Doue ha kenavezo !
Pa dlefent kaoud, tud vad ha paour,
War o bruched peb a groaz aour !

Gwelit du-hont, euz Enez Vaz,
Diou vag a zo o vond er meaz²⁰.
D'ar gwall-amzer dispak o lien
Ha ganto kaer hag uhel o fenn.

²⁰ er meaz : leoneg : er mêz.

Digeri 'hellont o goueliou
Pa'z eus douarou ha kalonou
Evel ar re a zo d'o has
Stard ha dispont war ar mor braz.

D'o diwall c'hoaz ganto ema
Ar Werhez ha santez Anna.
Avel outo ne enebo
Ha stur e neb leh ne stoko.

Evel diou wennili ez eont,
Dreist penn an tarziou e nijont,
En eur heja a-gleiz, a-zehou,
Evel diouaskell, o goueliou.

Spontuz eo ar mor da weled.
En diou vag ar vartoloded
Oh netra ebed ne zellont
Nemed a-raog el leh ma'z eont.

Mall eo dezo en em gavoud !
Ar gwalern fall a zut, a voud,
Ar mor a zao euz e oueled
Evel da lammed dreist ar bed.

Al lestr teir gwern a dro, a ya,
Evel eur votez o ruilla,
A ya dre 'n dour, hep stur na gouel
El leh m'her has mor hag avel.

An diou vag outañ a dosta,
Warnañ e wel Mari-Anna.
Daou ano kaer, mar deus ano,
Ano diou vamm, karet er vro.

Martoloded Baz pa welont
A gresk o nerz hag o dispont,
A lez da gas war an teir-gwern,
Dirollet outi an ivern.

Eno neuze neb a vije
A-lezi e galon a ouelje
O weled tud an teir-gwern baour
O hervel, o houlen sikour.

Ma ne vijent en em staget,
Euz o lestr 'vijent bet stlapet,
E vijent eet gand an tarziou
Da steki oh kerreg an aojou.

Al lestr a dro hag a zistro,
A gouez a-gleiz, a-zehou e sao,
A jom a-zav, 'ya a-benn-herr,
Dioh nerz pep tarz, skañv pe bounner.

Penaoz outañ o loh atao,
An diou vag kêz a dostaio,
Heb beza stoket gand al lamm²¹,
Beza flastret, i ker bihan ?

Doue a oa ganto o levia :
A-greiz ma'z edont o poania,
Eur frond-vor o tond dindanno
A gas anezo ahano.

A gas al lestr, heb e freuza
Ouz ar Benn-wenn da gosteza,
Hag eno, 'vel ma oe harpet
E chom heb flach, evel staget.

Tost d'an deir-gwern, tud an diou vag,
Eno neuze ne jomont vak.
Dre nerz o halon ha dre boan
E hellont kaoud braz ha bihan.

Setu tud an deir-gwern, tud an diou vag keaz
Bremañ e diou vag Enez-Vaz
O tond war-zu an aod goloet
A dudou koz hag a verhed.

Ar re-mañ 'drid o haloniou
Pa welont o tond o bagou,
Enno o zud, o zud karet,
Gand tud an deir-gwern rekouret.

Merhed keiz, na vezit laouen,
C'hwi hag ho tud 'hell kaoud anken ;
Pedit evito kaloneg,
Ar mor a lamm ouz ar herreg.

Ne oa ket torret an amzer,
Bagou tud Baz karget pounner
Ne hellent sevel war al lamm²²,
Na dond d'an aod nemed gand poan.

En o eneb gand ar vare²³
An avel a-benn a zave
Hag a strinke war an dud paour
'Leiz o bagou, pezh berniou dour.

Ar vartoloded en diou vag
Ouspenn o foan 'zo beg distag,
A gren gand aon na ve kollet
Tud an deir-gwern 'zo rekouret.

Da greski o nerz e sellont

²¹ al lamm : **notenn gand an oberour** : *lamm* est mis ici pour la rime ; il aurait fallu pouvoir mettre *gand an tarziou*.

²² al lamm : an tarz-mor.

²³ ar vare: galleg "marée", lano.

Ouz o merhed a zo du-hont
Gand o halon, gand o ene,
O pedi evito an neñv.

Savet he divreh, a-bouez-penn,
Ar wraeg a gri : « dalh mad, va den !
Dalh mad, mab, breur », ‘me ‘r vamm, ar hoar.
Dalh mad, dalh mad ! da zond d’ar gear ! »

Da galonou mad hag unan
Labour ha neh, enkreiz ha poan.
Gand karantez ouz o eren
A zo eur beh skañv da zougen.

Nerz ar galon a ziwant had
E peb amzer da ober vad.
En eur vro ‘vez enni gwelet
Eo mad ar wreg, mad he fried.

Er mor bremañ an diou vag keaz
O-deus poan gwaz eged biskoaz ;
A-benn-kaer ema an avel
O dalh dirag an aod a-bell.

Braz eo an neh hag ar glahar
‘Zo er bagou hag en douar ;
En douar e kren c’hoar, gwreg ha mamm ;
Ar bagou ne hounezont tamm !

Lavaret e ve a-wechou
E vent goueledet i o-diou,
Rag kaer a zo selled, selled,
Klask anezo : n’o gweler ket.

Glahar, gouelvan, kri-forz, daelou,
Ne glever ken dre an aojou.
Ne weler nemed merhed keiz
Gand ar rangalon en o hreiz.

Pa zao a-benn eur pennad mad
War eur bern mor, o roeñvad,
Diou vag, an eil war-lerh eben.
En aod fiziañs, war-lerh anken.

Kounnar ar mor hag an avel
Oh kalon greñv derhel na hell.
Trehet eo gand martoloded
‘Zo tost d’an aod ha d’o merhed.

An diou vag ‘deue d’an Aod-wenn²⁴,
O-diou an eil war-lerh eben.
Pa dro unan a-bez karget
Gand eun taol-mor euz ar goueled.

²⁴ Aod-wenn : eun ano-leh.

Mamm, c'hoar, pried, peb martolod,
Diwar an tevenn 'lamm en aod,
'Ziskenn d'ar red ha war o fenn
A ya er mor, diskrij, eeun tenn.

Evelto ar vartoloded
En-dro d'ar vag 'zo bet troet,
A neuñv, a zstum kement den
A bak o divreh oh astenn.

Pep tro a reont e teu ganto
Eun den bennag 'zo euz ar vro.
Pe dud an deir-gwenn o veuzi,
Ken dinerz ne hellont mui.

Gand martoloded, merhed Baz,
Den ebed eno ne jomas.
Ne jomas den ebed er mor,
Heb dond ganto beo d'an Arvor.

Gand ar merhed e oa unan
Tost da veza hebdale mamm.
Eno er mor 'lamm da genta,
E kav eun den, ez a genta'.

Ez a gantañ 'tre he divreh
Heb gouzoud piou, d'ar gêr heb beh
Hen tomm endra 'hell hebdale
Hag hen degas yah ha pare.

An dour-mor a zo dour-badez
D'eur mab 'zo bet gand e vamm-gêz
Oh ober vad kent ma hanas.
Mab ar vamm-ze 'vo den a hras.

Eur plah yaouank, skwer ar merhed,
A ya ivez er mor d'ar red,
A gav eun den paour o veuzi
Ha gantañ buan, ha buan d'he zi.

Eur martolod 'oa, yaouank-flamm,
Hnater-varo, ne fiñve tamm.
Berad ne gleve, ne wele,
Lakaet e oe en eur gwele.

Eno tommet ha goloet mad,
En-dro dezañ lakaet dillad.
Greet outañ kement a zere
E tihun 'vel euz eun huñvre.

Peleh emaon ? En Enez-Vaz !
Abae keid-all m'emaon er-meaz !
Va Doue ! Red eo ma ven er gear !
Sell ! va zad eo ! va mamm ! va hoar !

Ar vamm, ar hoar, o chom mantret,
Eñ, dezo, 'lavar, glaharet :
« Mamm ! me ho mab ; da vreur, va hoar !
Eet kuit mousig, deut den d'ar gear.

Distroet den, va lestr kollet,
Penaos n'emaon-me er goueled ?
Lavarit din e pe zoare
On deut amañ, yah ha pare. »

Gand o joa, tad, mamm ha c'hoar
A bok dezañ hag a lavar :
« Diou vamm az-poa hag a gares,
Santz Anna hag ar Werhez.

Ar re-ze eo, mab ha breur keaz,
Az tistro beo da Enez Vaz.
An distro yah evid deski
Eo mad o hared, o fedi.

Meul ar Werhez, santez Anna !
Ganez ez aim da bardona.
Ganez gand ar vartoloded
Eveldout ganto rekouret.

Da iliz sant Paol e penn Baz,
Ganez, ganto ez aim warhoaz.
Hag e savim gand or halon
Eur hantik nevez d'on Itron. »

Ar vamm, ar hoar, a lavaras,
Hag antronoz oll da Benn-Baz²⁵.
Ar vartoloded da genta
Ar merhed d'o heul a ya.

²⁵ Benn-Baz : **notenn gand an oberour** : L'ancienne église de Saint-Paul se trouve en effet à l'extrémité Est de l'île de Batz.

Eur beleg koz

Goude sant Paol, kalz beleien
'Zo bet en Enez Vaz o ren,
O sklêrijenna an eneou,
Touriou-tan war hent an neñvou.

Aboe kant vloaz pe war-dro
N'eus ket bet eur beleg er vro
Ha n'en-defe bet kalonad
Ha gouelet leiz e zaoulagad.

O weled 'vel eur baourez kêz,
Beteg he daoulain eet en trêz.
Iliz kenta Abostol Leon
En noaz o tiwall an anaon.

Eur pennad 'zo ez eo maro,
Eur beleg koz bet en ho pro,
O wenna e vleo o pedi.
Tad Enez Vaz, evidoh-c'hwi.

Eñ ivez, evel ar re all,
Pa gleve 'n avel o voudal
Oh Iliz Paol ken a grene,
A hirvoude, leiz e ene.

Pa wele 'r vein o tistaga
Gand aon na deujent da goueza,
E galon 'veze glaharet :
Klevet eo bet 'lavared :

Allaz ! ar hêz koz 'zo maro,
Hag en o zav ema atao
Mogeriou Iliz Paol a gare,
Hag a wel bremañ euz an neñv.

Evidoh-oll, tud Enez Vaz,
Evel gwechall ho person c'hoaz
A bed en neñv 'vel war ar bed ;
Ne oufe chom heb ho kared.

E lezenn genta, diweza,
A oa kared Doue, e nesa,
Kared ar paour, breur da Jezuz,
Beza outañ madelezuz.

Kared an Iliz hag ar feiz,
Ar brezoneg, yez an dud keiz,
Kared e vro hag Enez Vaz,
Poan enni 'vel en-dro mor braz.

Ho kared, c'hwi martoloded,
Ha kaoud truez ouz ho merhed,
Evidoh oll pedi noz-deiz,

Goulenn deoh yehed ha feiz.

Evdi an oll e oa eun tad,
Evid an droug e ree ar mad,
Da enebour ha da vignon
Digor e di hag e galon.

E-pad tregont nemed tri bloaz
Eo bet person en Enez Vaz ;
Eno m'en-divije gallet
En ho touez e vije marvet.

Eno e oa e galon eaz²⁶,
Ha dezañ'oe eur glahar braz,
En deiz ma rankas kimiada
Dioh tud ar vro 'gare 'r muia.

Diouz ar re en-doa badezet
Ha diwezatoh dimezet,
Diouz paour, tad, mamm, bugaligou,
Diouz ar re goz en o beziou.

En e galon 'oa kalonad
Ha daelou leiz e zaoulagad,
Pa rankas mond koz, hanter-zall,
Diouz e iliz, e brespital.

Pa n'helle chom ez eo bet eat²⁷
Da vro e vamm, da vro e dad.
En o hichenn, paour, da vervel
D'harpa e vez oh e gavell.

E ti gwella beleg a zo
E Plougouloum eo bet maro,
Etre divreh diou galon vad
Bet d'am eontr koz 'vel breur ha tad.

Tad ar person, breur ar mevel
Da ober vad o-daou heñvel,
Entent a reont ezu ar hêz koz
Entent o-daou en deiz, en noz.

Dezo evid o madelez
D'an dud vad all, kant trugarez !
Bezef Bennoz Doue warno !
Tud vad 'velto war o maro.

²⁶ eaz :leoneg : êz.

²⁷ eat : leoneg :eet.

Pa oan paotr bihan²⁸

Breur 'oa d'am zad ; o tond er bed
Gantañ ez on bet badezet
Ha din, kristen, e roas ano
E vreur yaouank nevez-marô.

Goude, d'e di euz ti va mamm
Ez ejon da jom yaouank-flamm,
Ha mar boe den euruz biskoaz
Eo me gantañ tost d'ugent vloaz.

Gantañ, me a zo bet savet.
Gantañ gwisket, skoliet, karet,
Oh e weled 'tesken bemdez ;
N'eus den euruz heb madelez.

A-raog, gand va mamm ha va zad,
Em-boa desket meur a dra vad ;
Da bevar bloaz lenn brezoneg
Ha kared ar paour ezommeg.

Eet da Zaqnteg war-dro c'hweh vloaz,
E ti vqa eontr, e oe din eaz²⁹
Diwar c'hoari ar gornigell
Kreski eun tamm va skiant bugel.

Skiant ar bugel a daol evez
A ziwan dezañ gouiziegez,
Yehed, eurusted, ha furnez,
Gand ma labouro digernez.

Evel gand va mamm ha va zad,
Gand va eontr e oe din ebat
Deski traou kaerroh eged aour,
Evel er gêr, kared ar paour.

Gaqnd ar paour bemdez e preden ;
Ar paour ha me en eur gichenn.
Ni 'zebre farz, patatez, yod,
Ha beb eil tro e skoe er pod.

Pa veze din an tamm kenta
'Veze d'ar paour an diweza,
Ha n'eus forz petra a vije
Ni, etrezom, en em gleve.

Ha koulskoude neuze, 'kaven
Kalz naturroh bara-panenn
Pe yod, pe lêz, pe batatez
Eged hirio kig rost, krampouez.

Va eontr a hoarze o weled,

²⁸ Note gand an embanner : Ce chapitre concerne M. Milin lorsqu'il était enfant.

²⁹ eaz : leoneg : êz.

Ha me 'gav din c'hoaz o klevet :
« Mad eo ranna gand ar paour-kêz
'Vid beva koz ha mervel êz. »

« Bugel a zebr gand eur hêz koz
A zegas war e benn bennoz,
Deut da vraz mar kar kenderhel
Da rei d'ar paour muia a hell. »

« Pa vezi d'az tro war an oad
E weli, paotr, pegen ebat
Beza bet gand paour o preja
Penaoz bennag 'hellfez beza. »

Gwelloh 'oa c'hoaz ar pez a ree
Eged kement a lavare ;
E weled a oa eur gentel
Ne oa din koulz na dreisti gwell.

Eur gentel 'oa hag a zesken
Hep kalz a boan dre ma kresken,
N'em-beus ket he ankounac'haet
He ankounac'haad ne rin ket.

Ne gav ket din 'parfe biken
Kurunenn Doue war dal eun den
'Laka spered, enor hag aour
Dreist ar garantez oh ar paour.

Truez en-deus Jezuz on tad
Oh karantez ha kalon vad ;
Ganto 'lugern ar Baradoz
Kaerroh eged heol-hañv dioh an noz³⁰.

Evel-se e oe digoret
Va halon a-raog va spered,
Hag ezu av halon sklêrijenn
A strinkas en deñvalijenn.

Evel-se bet maget, savet,
On bihanig deut da gared
Ar paour 'zo e poan da genta,
Ha goude karet, da gana.

Da gana kement a welen,
A oa mad hag o-doa anken,
Kement a gleven war ar bed,
Oh hirvoudi ha glaharet.

An neñva pa doulle ar valkenn
Dreist pep tra 'zo, kaer a gaven,
Ar mor, 'vel Doue, don ha ledan,
Hag an den, er bed, ker bihan !

³⁰ dioh an noz : pa deu an noz.

Heñvel oh eul laouenanig
A lamm, a drid, a gand drantig,
Me a gane hag a veule
Va yez, va bro, ha Doue ive’.

Va herent ha va mignoned,
Kement a garen dre ar bed,
Dre nerz va halon e kanen,
Dre nerz va spered ne hallen.

Eurusoh egedon n’oa den,
Dindan an heol pa bar laouen,
Euruz meurbed gand va eontr koz,
Euz ar mintin beteg an noz.

Peb deiz er bed a houlaoue.
Me ‘lamme, ‘hoarie, ha c’hoarze
Ken na glevjon e oe red din
Deski gregaj galleg, latin.

Ganen, bugel, ‘vije bet gwell
Mond war ar mor d’ar broiou pell,
Pe labourad noz ha mintin,
Gwell ‘ged deski galleg, latin.

Gand va eontr a gare va mad,
E oen dalhet, ‘eneb va grad,
Dalhet er skol ; dezañ bennoz !
Me ‘oa diskiant, fur va eontr koz.

Neuze ‘oe din eur c’hoari all
Ha d’am spered eur gwall gabal,
Rankoud difuilla eur gudenn
Ne gaven dezi lost na penn.

War ar studi ma ne oan kreñv,
Eo va spered ne zigore
Da zeski latin ha galleg,
Dre houzoud nemed brezoneg.

E galleg, latin ha gregaj,
Ar geriou a baken beweach³¹
A ranke beza tremenet
Dre ar brezoneg em spered.

Neuze e sellen ouz ar mor
Hag ouz ar hoabr dreist an arvor,
Ouz eur wennili o nijal
Ne zeske ket koz gregaj fall.

Neuze ‘m-bije karet beza
Evel eur paotrig a yea³²
Gand e vagig d’ar red d’an aod,

³¹ beweach : leoneg : bewech.

³² yea : leoneg : a yee.

Da hoari beza martolod.

Neuze, pa hellen-me astenn
Va divesker war an tevenn,
Paka an aod en eur redeg,
Me a roe avel d'ar galleg.

Neuze avad, neuze 'c'hoarienn
Diarhen, dizolo va fenn,
E lammen dreist mein ha bezin
Gand eur horvad latin kegin.

O tond d'ar gêr p'en em gaven
Pe en hent pe war ar grehenn
Gand paotr pe baotrez euz va oad,
E veze c'hoari pe grogad.

Ahano pa deujen d'ar gêr,
Dre veur a doull e weled sklêr,
Toull va bragez, va rokedenn,
Ma c'hoarze an dud o tremen.

Dre gement-se n'eo diêz gweled
Pa hellen-me ne laosken ket
Va lodenn c'hoari gand eun all ;
C'hoari d'ar bugel n'eo ket fall.

Ar vugale war ar mêziou
'Zo eurusoh 'ged er hêriou ;
Er hêriou int 'vel laboused
A ve paket en eur gaoued.

A ve trohet o diouaskell,
Da vired na nijfent re bell
Ha ne dafent da heul re all
Da en em goll gand ar re fall.

War ar mêz n'eo ket evel-se :
En eur zevel euz e wele
Ar bugel a ya euz ar gear
Amañ, a-hont, el leh ma kar.

C'hoari, redeg a ra bemdez
En heol pe a-zindan ar gwez,
Er park, el liorz, er prad, er hoad,
Heb den gantañ : plah, mamm, na tad.

Ruilla a ra war al letonenn
Pe mond war-lerh eur valafenn,
Klask paka eur pesk er houer,
Dond goude glebdour-teil d'ar gêr.

Evel-se e teu d'ar bugel
An nerz a zo red da zevel,
Nerz da zigeri e spered,

Ha nerz d'e galon da gared.

Da gared e dud hag e vro,
Pa vez red d'harpa anezo,
Da gared feiz ha brezoneg,
Da veza den mad, kaloneg.

Evel-se eo, war ar mêziou
E sao tud stard o halonou,
Labourerien, martoloded,
Merhed gwad yah en o gwazied.

Ar bugel war ar mêz ganet
Gand lêz e vamm a zo maget,
Dre ma kresk laosket diluren³³
Da zond abred da veza den.

Gounid e voued abared e rank,
Labourad tenn hag eñ yaouank ;
Goude c'hoari, dastum furnez.
Beza oh e boan digernez.

Eun tremeniad war ar bed-ma'
An den kêz n'en-deus da veva
Nemed bara diwar enkreuz
Da hortoz ma hourvez er bez.

Evdi herzel ouz e boaniou
A lamm outañ evel tarziou,
Gwella zo, teuzet en e greiz,
Eo ar garantez hag ar feiz.

Al lezenn genta, diweza,
A zo kared war ar bed-ma',
Kared Doue a zo peb mad,
Kared ar vamm, kared an tad.

Kared pried ha bugale,
Harpa anezo da vale,
Hep selled a-gleiz hag a-zehou,
Nemed bepred oh an neñvou.

Ahano 'tarz an dour erien³⁴
A dorr sehed ar Gristenien ;
Gwir garantez kalon Jezuz
'Zo oh an oll trugarezuz.

Ahano c'hoaz e teu ar Feiz
A zo didorr an dud e Breiz,
D'ar Feiz eo skañv pep beh pounner,
Peb labour diêz, êz da ober.

Gwazennig heol dre ar valkenn,

³³ diluren : en e frankiz.

³⁴ erien : **notenn gand an embanner** : *erien* est sans doute ici pour *eienenn*.

Dizoan ar galon en anken ;
Feiz a zigor d'an dudou paour,
War drein ar bed bleun-melen-aour.

Feiz ar paour e vir da vervel,
Rag pa gar Doue dodn d'e hervel,
E kas e gorv d'ar bez hep klemm,
Hag e ene d'an neñv eeun-tenn ;

C'hwi, Rouanez, Impalaered,
Tud pinvidig eüruz er bed,
C'hwi pa vez red deoh diskregi,
'Glever gand doan oh hirvoudi.

Hirvoudi doaniuz a hellit,
Rag, o vervel, pep tra 'gollit,
Gand hoh enor, gand ho tanvez,
Ma n'hoh-eus Feiz na karantez !